

Kantik Intron Varia Dremoren

VAR DON : *Intron Varia ar Porzou.*

DISKAN : *Intron Varia Dremoren,
Klevit mouez ho pugale ;
Bezit ato hor stereden ;
Hon diouallit noz ha de.*

Labourerien, martoloded
Da chapelik ar Verc'hez,
Laouen omp hirio diredet
Da bedi hor Rouanez.

Evel eur bugelik bihan
'Red da gaout he vam dener,
En hon anken ni zeu buhan,
Mari, beteg hoc'h auter.

'Vel ar c'haro en e zec'hed
A glask dour an eienen,
Ni, pa ve paoniet hor spered,
D'eoc'h-hui a ra eur beden.

Aman oc'h dindan tri hano
Gant hon tadou bet pedet,
Hanoioù ken doue d'ar geno
Ha ganeomp kement karet !

Roit ho pennoz d'ar parkeier,
Evit ma vint frouezuz,
Ho pennoz ive d'hon tier
Ha bennoz ho mad Jezuz.

C'hui voar, Mari, ez eo c'huero
D'al labourer kaout eost fall ;
Grit ma vo id mad en ero
Glebet gant c'huezen e dal.

Stereden ar mor oc'h hanvet,
Diouallit ar martolod,
Rag Jezuz en deuz he roet
D'hoc'h da zifenn 'vit ho lod.

Varnean, ebarz e vagik
Luskellet gant ar wagen,
Deuz an nenv tōlit eur zellik,
Astennit ho torn d'hen ren.

Kasit pell, Intron a Druez,
Ar goal amzer diouzomp ;
Amzer gaer 'vit ar beskerez
Harz ho treid a c'houlennomp.

Ra vo leun-tenn hor rouejou
Hag hor bag epad ar bla ;
Pa 'n eus naon hor bugaligoù,
Red eo rei d'ezo bara.

Guerc'hez Vari, ouzomp sellit
Pa zono kloc'h Tremoren,
Neuze buhan hor zikourit,
E vouez gas d'eoc'h hor peden.

Kemennit eta d'an avel
Ha d'ar gurunou spontuz
Euc'h ar mor e kounar tevel ;
Ho preac'h zo oll-c'hallouduz.

Ni ve laouen e kreiz ar mor,
Pa velomp tour ho chapel ;
Neuze ni gan en hoc'h honor
Eur c'hantik gant an avel.

En danjer ha tōst d'ar maro
Ni ho ped, ho ped kalet ;
Mar eo ho torn hon dicuallo,
Biken ne vezimp kollet.

D'an den dall roit ar sklerijen,
Intron Varia 'r Sklerded ;
'Vit-se dour feunteun Tremoren
Ganeoc'h zo bet benniget.

Ar Feiz hirio a dec'h buhan
Deuz hor bro ger Breiz-Izel ;
Eur vanden tud fall heb ehan
Ra d'ezi eur goal vrezel.

Grit ma vo stard evel guechall
Lezen Doue en hor c'hreiz ;
Heb d'ezi n'eus 'met noz tēval :
Kaer eo sklerijen ar Feiz !

O Mari, o mam a Druez,
Mam a C'hraz hag a Sklerded,
Ebarz an nenv gant an elez
Roit d'eomp oll an eurusted.

N...

Imprimatur :

Quimper, le 6 Septembre 1927.